



CANTIC SPIRITUEL

*En enor d'an Itron SANTEZ ANNA AR
PALUD, ur Plaç Santel a so' en
Escopti Qerne, e Parres Plonevez-
Porzay, a dost d'ar môr.*

V. m.

Var ton : Santez Mari, Mam Doue.

ME ho ped, Tad eternal, Crouer ar firmamant,
Roit d'am speret sclêrigen, Doue oll-buissant,
Da zizoloi un tenzor a so en Breiz-Izel,
Etouez ar Vretonet leun a c'hraçou santel.

Guerc'hes glorijs Vari, m'ho ped, va sicouret,
Chouj, Itron Santes Anna, so enni enoret,
Evit disclêria d'an oll ho craçou excellent,
Hac ar miraclon a rit, rozen ar firmamant.

En Escopti a Guerne, e bordic ar môr glas,
E parres Plonevez-Porzay eus ur sourcen a c'hraç,
Ur plaç leun a viraclou, mar deus var an douar,
Batisset en ur blenen dirac an heaul pa bar.

Calz eus a blaçou santel a veler batisset
D'an Itron Santez Anna, e peb lec'h enoret,
Balamour ma ra bemdez nombr bras a viraclou,
Hac er môr hac en douar e cleo hor pedennou.

Mes hep choqi nep chapel so dezi batisset,
E deveus ur plaç santel er Palud benniguet,
E leac'h ma zeo enoret guir Vam-gôs hor Salver
Gant an oll belerinet demeus a bep carter.



Ar plac-mâ so frecantet gant guir devotion
 Gant ar gristenien fidel demeus a hep canton,
 Balamour m'e deus roet calz a soulajamant,
 Ha ma obten ar yec'hed da galz tud languissant.

Pob! a Escopti Qerne, c'houi a so eürus
 Da gavout en ho touez guir Vam-gôs da Jesus,
 Deut oll da c'houlén outi ar gracoù necesser,
 A galon vad d'e fedi d'ho tiouall diouc'h danger.

O Itron Santez Anna! bremâ va sicouret,
 Pedit ho merc'h, ar Verc'hes, da rei din ar speret
 Ma ellin, dre ho sicour, comz eus ho miraclou,
 Hac eus an oll joausdet a laqit en hor bro.

C'houi oc'h eus plantet ar ros elec'h ma voa ar sperr,
 Ha grêt hent ar barados eus an hent an ifern;
 C'houi oc'h eus bet distroet pec'herien caledet,
 Hac o laqet da veza tud santel ha parfet.

Me ho suppli, tud devot, selaouit a vremâ
 Comz demeus ar miraclou a ra Santes Anna,
 Ma teufot oll a galon d'ar Palud d'e guelet,
 Ha ne gollot qet ho poan dre grac Salver ar bed.

Eus a barres Plougastel voa ur bêleg yaouanq
 Privet demeus ar guelet, hac en bras nec'hamant,
 E spac demeus a dri mis, siouas, en eur goall stat,
 Hep lavarar oferen gant an drouc daoulagad.

Alliet voe gant e dud ractal d'en em voestla
 Er Chapel eus ar Palud d'hor Mam Santez Anna;
 En devez ma erruas en deus oferennet:
 Meulet ravezo Jesus hac e Vam benniguet!

Eus a guichen Ponabat ur certen plac'h yaouanc
 Bet tri bloaz gant an derzien, en ur stat afflijant;
 Un naovet e deveus grêt er Chapel ar Palud,
 Bet e deveus ar yec'hed a zirac calz a dud.

Demetis ar guær a Guemper ur pautrie daouzec vloa,
 Espaç eus a dri devez bet gant an divoada,
 E vam neuze a ofiras e mab a galon vad
 Da Santez Anna'r Palud, ractal e cess ar goad.

Ur vatimant voc carguet, var e guenta beach,
 Gant an tourmant attaget, o tremen Bec ar Ras,
 Peder heur varnnguent bet etre an daou dour,
 Perissa oll a sonjent hep gallout caout sicour.

Ar c'habiten, den devot, hac ar vartolodet,
 Da Santez Anna'r Palud o deus en em voestlet,
 Dre ar graç eus a Zoue hac e Vam-goz Anna,
 Rentet e voent e pors Brest, disanger ha gant joa.

Evit e drugarecât, ar vœu o deveus grêt
 Mont dierc'hen d'ar Palud, ha var gorf o rochet,
 Gant pep a ciergen coar, evit rei testeni
 Eus ho miracl qer eaër, Mam ar Verç'hes Vari.

Un den yaouanc eus a Vrest, a uguent vloas oaget,
 Pehini voa gant ar vrec'h, a gollas ar guelet,
 A ras calz a nec'hamant ha d'e vam ha d'e dad,
 Guelet ur seurt den yaouanc e coll e zaoulagad.

Ur personach charitabl o allias qerqent
 D'e voestla prest d'ar Palud da Vam Roue ar Zent;
 Ractal ma o deus laget oferen evitâ,
 E recevas ar guelet dre c'hraç Santez Anna.

En Escopti a Leon, e Parres Ploudaniel,
 E deus grêt Santez Anna ivez ur miracl coulz pe vell
 En andret ur plac'h yaouanc a so bet attaget
 Memes e qichen e dôr gant ur c'hy arraget.

Ar plac'h-mâ, pa er guelas, a gommanças crial:
 O Santez Anna'r Palud! va sicourit ractal.
 Dre bermission Doue ar c'hy a lam timat
 En e arrach gant ur men, en abimas a voat.

Just eo c'hoas, en hoc'h enor, parlant eus ar graçou
 Oc'h eus obtenet d'ar bobl epad e glénvejou.
 An dud oll en o zyes, siouas, var o guele!
 Voa evel hospitaliou gant ar c'hlévet lous-se.

Ar re o deus bet boneur d'en em recommandi
 Deoc'h en o affliction, Mam ar Verc'hes Vari,
 A veler o tont bemdez d'ho Chapel benniguet
 Da drugarecât Doue da veza bet yec'hed.

Soudardet, martolodet, ne aller qet nombri
 An niver a ve guelet bemdez var dro ho ti,
 O trugarecât Doue d'ho beza preservet
 E creiz an oll maleuriou, d'an danger exposet.

Calz so c'hoas a viraclou pere ne hanvàn qet,
 E deus grêt Santez Anna er Palud benniguet,
 En andret tud afflijet demeus a bep carter
 Bet soulaget er Palud dre graç Mam hor Zalver.

Tud cam, tud dall ha bouzar e deveus soulaget,
 O rei ar c'hlévet, ar guelet, hac an nerz da guerezet,
 Calz bugale languissant o deus santet e graç;
 An oll a receo yec'hed enni bian ha bras.

Ha bagou ha gobiry e deveus preservet,
 Ha tud couezet bars er môr, pa zint dei n'em voestlet,
 O deveus bet recouret o buez dizanger,
 Dre graç vras Santez Anna, guir Vam-gôs hor Zalver.

Pobl eus a Douarnenez, m'ho ved, na vanqit qet,
 Pe en em guéfot en danger, troit pront ho speret
 Oc'h Santez Anna'r Palud; pedit-hi a galon vad
 Da zonet d'ho preservi, ho Mam, hoc'h Itron sacr.

Qement en em gav nec'het gant an affliction,
 En em voestlet er Palud gant guir devotion,
 Ha me a ell assuri, gant guir fidelite,
 E teufet joaüs d'ar guær, en eur veuli Doue.

E pêvar c'horn ar c'harter approuvet gant an dud
 ar graçou qen necesser a receiver er Palud.

E Brest hac e Landerne, er Faou hac e Qemper,
 E santer ar garantez a Vam-gôs hor Zalver.

E Conquerne, Enez-Tudy, Penmarc'h ha Ponnabad,
 E Pontecroas, e Goaien e qever testou mad.

En o afflictionou o deus-i invoqet,
 An Itron Santez Anna, o deus-i exaucet.

E Plougasnou, Plouezoc'h, Guimaec, Plegat-Guer-
 rand,

E Botsorhel, Plougonven, Plouigno, ha Garland,
 E St.-Thegonnec, Pleyber, Plouneour, Commanna,
 E zeus calz devotion d'an Itron Santez Anna.

Carantec, Henvic, Taule, Plouvorn, Plougoulm,
 Mespaul,

Roscoff, Guiclan, Plouenan, Cleder, Castel, Lampaul
 Anfin, an oll barossiou demeus a Vreiz-Izel

A bed hac a rent hommach da Vam ar Verc'hes santel.

Bep meurs etro pad mis eost e zeus induljançou
 E Santez Anna'r Palud, pardon d'hor pec'hejou;
 An nep a raï a galon ur gôvession vad,
 A recevo corf hor Zalver gant ur feiz admirab.

Nep en deus devotion da zont d'ar pardon bras,
 Dar sul diveza a eost ema'r sourcen a c'hraç :
 An deiz-se e deus choaset, hor Mam Santez Anna
 Vit beza enoret gant oll dud ar vro-mâ.

O côves, o communia da zevez ar pardon,
 E Santez Anna'r Palud, gant guir devotion,
 E zeus induljanç plenier gant ar Pab accordet
 An oll Gristenien fidel a zeu d'e darempret.

Me ho suppli, Christenien, douguît gant peb respet
 Er chapeled en enor da Santez Anna benniguêt ;

Deut d'e lavaret a galon bep meurs, na vanqit qet,
En enor Santez Anna, e viot recompanset.

E Montroulez e caver ul levric ar c'haera,
Pini'n deus evit hano : *Levric Santez Anna.*
Ennàn e mâ an offiç deus a Vam ar Verc'hes;
Lennit ha meditit-én, me ho ped alies.

Deut muia ma vo possubl d'ar Palud d'e guelet,
Da visita e Chapel, e feunteun benniguet,
Ha me assur, goulennit ar graçou a guerrot,
Gant ur galon preparet, certen o recevot.

O Itron Santez Anna, hor Mam hac hon Itron!
Hon recevit oll bremâ dindan ho protection,
Pedit hor Zalver Jesus d'hor sicour nos ha de,
Hac en heur eus ar maro da receo hon ene.

F I N.



CANTIC

*A veuleudi d'an Itron SANTEZ ANNA, enoret
par res Plonevez-Porzay, e Chapel ar Palud
a dost d'ar môr.*

Vieux
Var un ton nevez.

ME hoc'h ador, va Doue, eus a greis va c'halon,
Hac a rent d'ho Majeste mil benediction
Da veza hon enoret ha carguet eus a joa,
Ar graçou bet accordet d'hor Mam Santez Anna.

Q' sourcen an oll graçou ha leun a santelez!
 Recevit hor c'halonou, Mam leun a vadelez,
 Petra benac ma zomp indign eus ho protection,
 Supplii ho Mab divin d'accordi deomp pardon.

Itron gant Doue caret, rozen mysterius,
 Ac'haoc'h eo sortiet Mari, Mam da Jesus,
 An hini a voa choaset a bep eternite
 Da garga a joausdet an douar hac an eê.

C'houi eo ar guir Batronez eus an dud demezet,
 Hac ar guir Advocadez d'an oli intanvezet,
 Tenzor an oll vertuziou, exempl ar guerc'heset,
 Hac ur Vam leun a c'hraçou da guement den ho ped.

Demeus a greiz hon ene ha gant ur guir fizianç
 Ec'h offromp d'ho carantez oll rouantelez Franç;
 Pedit Doue d'accordi d'ar Roue guir gristen
 Ar c'hraç da gaout ar victor var e adversourien.

O Itron Santez Anna! bezit advocades
 Evit ar Princet Christen hac oll dud ar Pales,
 Ar pennou principala a so ouz hon difen,
 Obtenet dezo ar c'hraç da souten al lezen.

Recevit, Mam benniguet, ni ho ped a galon vad,
 Dindan ho protection hon Tad santel ar Pab,
 Ivez ar Gardinalet hac an oll Esqibien,
 Hac an oll dud a Ilis da gresqi al lezen.

Sicourit, Mam druezus, hon zud en armeou,
 Astennit ho torn eürus a uz ar c'hombatjou,
 Chasseit hon adversourien a bell demeus bor bro,
 Ma yimp fidel d'ho lezen tre betec ar maro.

Obtenit, me ho suppli, ô Mam garantezus!
 D'ar re so en agoni ur maro eürus;

Obtenit digant Doue, d'ar graguez so poanniet,
Badiziant d'ar vugale, ha d'ar vam ar yec'hed.

Hon tud hac hon oll madon a leqomp oll gant joa
Dindan ho protection, Itron Santez Anna ;
Pedit an Drindet santel da zont d'hor pardoni,
Ma ellimp, dre ho sicour, mont d'an eê d'ho meuli.

F I N.



E Montroulez, eus a Imprimeri LÉDAN.